



QUERZ

VAR SUJET UR FEMELEN MANET INTANVEZ

GANT PÊVAR BUGUEL

Var ton : *Cantic ar Burele*

Ni o suppli tud devot
 Dont da silaou a galon
 Ur c'hantic truezus
 A doucho ho calon :
 A zo grêt d'eun intanvez
 Demees a Breiz-Izel
 O qimiadi oc'h oc'h e mab
 Partiet d'ar brezel
 Qement a glêo ar ver-mâ
 Hac a rêi reflection
 A zo crior evit eul leon
 Ma ne al dont da ou cla
 Pa entento e lenn
 Oll dont da sonjal
 Ne deo qet guir gristen.

Drindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin.

Dme ho ped rêi sicour d'ho servicher indign ;

Sa speret a zo frañil, ha va studi izel,

Velêc a c'houlennân ouzoc'h, Drindet Santel.

Guerc'herz Vari, d'êc'h en em adressân :
Obtenit din ar memoar evit ellout rimân,
Pa gomprenân ar sujet, a ra din scuill daelou,
Me gred a vezo mantret oll gement a c'hêvo.

Cruelloc'h e zomp êru eguet an tirantet
Pere laqas d'ar maro hor Zalver beniguet ;
Ne zeus tam humanite etouez ar gristenien ;
E zit da velet ractal eus a ze ar breuven.

Me gomz ouz ur femelen euz a Escopti Dol,
A voa manet intanvez, e hano Anna Bol :
Pêvar eus a vugale a chom gant ar vrug-se ;
N'oa qet c'hoas achu'r pemp blas ar c'hossa eus anê.

E daou yaouanqa a voa n'o guele languissant ;
Sônjomp ebars er viser hac ebars an tourmant
E deveus bet ar vreg-màn gant e bugaligou,
Hep cavet nep tam zicour digant den eus ar vrô.

Gement tam meubl e voa a voerzas prontamant,
Evit allout rêi souten d'e fêvar innoçant :
E zamouigou dillat prest goude a voerzas ;
Truezus voa e guelet cazi ebars en noas.

Bremàn var un tamic plous en eur c'horn eus an ti,
E renq monet da repos, e bugale hac hi.
E daou buguel languissant a zo-êt gant Doue,
Hac hi chom paraltic qerqent var e guele.

He mab hena a lavar ; me ya da zervichi,
Ha gement a choneîn vo vit ho soulaji
Lavaret a ra d'e vreur : bez soign diouz hor mam guêz ;
Hit da glask dêi tamou bouet, ha n'ho po qet a-vez.

E mab hena neus cavet eur gondition vad ;
Mes gement a c'honêe a lage en dillat :
D'ar gloar ha d'ar vanite e zê en em livret,
Ne sonje qet en e vam var e gêle chommet.

E mabic anter-hena a voa ganti chommet,
Hac a yê bemde endro da glask dêi tamou bouet ;
Soigni rê e vam bemde, ha goalc'hi e dillat
Ema eo güir melezour a vugaligou vad.

E mab hena voe en oad da denna d'ar billet :
Mes dre m'oa mab intañvez e zeo bet exantel ;
E vreur, e blavez goude, en deveus bet tennet,
D'accomplissa ar glac'har an numero isel en deus bet.

Brêmâ e retorn dar guêr hac e galon mantret,
P'êru e qichen e vam calz daelou n'eus scillet :
Va mamic paour, emenâm, petra refot brêmâ ?
Me meus numero isel, hac a renq partia !

E vamic paour en consol gant comzou doue meurbet,
Va buguel qêz, emezi. n'em gonformi zo rêl ;
Bezit propr ha den honest, grit ervat ho tever,
Ha me a bedo Doue d'am gonsoli er guêr.

Lavarat a ra d'he vam da gaout va breur me ya
Vit e bedi ur veach qent partia ;
Da rêl dec'h un dra benac ur vechic an amzer,
D'ho soulaji, va mam baour, ebars en ha mizer.

P'êru e qichen e vreur, e lavaras deân,
Me meus bet eur billet du, hac a renc partian
Ho pedi rân, va breur qêz, da rêl un dra benac
Da zoulagi or mam baour, a zo qer miserabl !

E vreur a respont deân : na zeu qet var va zro
D'interrompi a c'honon gant da finesseou :
Qentoc'h eguet da gredi, me c'houl bea ractal
Rentet amâ var plac bouzar ha mud ha dall.

Accordet e voe deân pez en doa goulennet,
Rentet ha dall ha bouzar, ar gomz en deus collet ;
Rentet e zeo maleürus bete fin e zeyou ;
Demeus ur seurt accidant Doue d'hon preservo.

E vreur evel m'er gielas bars er stad-se rentet,
A zo retornet d'ar guêr hac e galon mantret ;
Lavarat a ra d'e vam, en eur scuilla daelou :
Va breur eo'r maleürussa a guement zo er vro.

Dal ma meus laret deân rêl un dra benaqet,
Da zoulaji va mam baour, en coler e zeot et ;
Goulennet en deus bea bouzar ha dall ha mud ;
Bet en deveus e c'houlén dirac an dud.

E vam a lavar deàn : na veles gen ! me bed
Dôue a visericord da rêi did ar guëlet,
Gouzout a rit, va buguel, Doue zo eun Tad mad ;
Hac a bardon ar pec'her demeus a galon vad.

Pa voa ar vam desolet d'e buguel o prezeg
Eur jandarm ebars an ti a zo bet entreet,
Da rêi deàn e vultin da partial ractal,
Emà zo bet dê o daou an divea glac'har.

Ar vam baour oll desolet a lavar d'e buguel :
Deus c'hoas etre va divrec'h ur vech gent vit mervel.
En em boqat a rejont an eil hac eguile ;
Ranna rêje ar galon a glêvje aneze.

Ar buguel-màn dezolet a lavar d'e vam guéz :
Bet òn e clasq dêc'h sicour ebars en amezeguez ;
A boan euz va zelaouet ha priset va c'hlevet :
Evelse, va mamie gêz, c'houi vo abandonnet !

E vam a lavar deàn : partiit va buguel,
Ha va list on gloar Doue..., ret e vezo mervel,
Serrit an nôr var va c'hein ha cassit an alc'hoc,
En eur c'horn eus an ilis em c'hesot goude ze.

Question e voe bremâ dê d'en em separi,
Piloabl e voa clêvet ar c'hri a voa en ti.
Adieu dêc'h, va mamie paour, a lar ar buguel gêz.
Ranna a ra e galon pa voa e vont ermêz.

Alc'hoef en deus an nôr var e vam languissant,
Mont a ra gant o alc'hoc d'an illis prontamant ;
Laquat eure aneàn var gornic an auter :
Aze meàn, m'en cavo, ma tistroàn d'ar guer.

Stoui ra va e zaoulin en illis beniguet :
Goulèn a ra ur mennat digant Salver ar bed :
Accordit din, va Doue, ma teuin da velet
Enterri va mamie paour pa vezo decedet.

Cetu-èn-ta partiet da vonet d'an arme ;
E vamie paour a varvas penezec devez goude ;
Ar c'hleyer eus ar harros a zon dezi glazou,
Hac e guntinu nôs-de hep caout den var o zre.

Accordet e voe deàn pez en doa goulennet,
Anter rant leo demeus ar guer ar c'hleyer neuz clêvet
Larat ra de gabiten : Va mamic baour zo maro,
Me glêo patant ar c'hleyer o son dezi glazou.

E gabiten a lavar : Eur miracl bras e ve
Clêvet cleyer ho parros santer cant lêo anê.
Larat ra de gabien gemeret un tam,
Ha c'houi glêvo aneze aman qercoulz ha me.

E gabiten a lavar : Me o c'hleô coulz ha te;
Me royo dit, va buguel, bremanzon da gônje
Ma zi d'ar guêr da velet enterri da vam guez.
Rac gout a ram da galon zo en trisdiguet.

P'en devoa bet e gônje e vale nôs ha de;
Eruout a ra er guêr hep na voe pell dâlê;
Monet a ra d'an ilis, ma stou var e zaoulin
Da drugarecat Doue eus e c'hraçou divin.


Pa voe êchu e beden e gemer an ale'hoë
A dal ma tigor an nor e sell ouz e güele.
Ma cav e vam baour maro, varni en em dolas,
Gant ar glac'har en devoa e galon a rannas.

An nôr voa manet digor, tud a zo antreet,
Ma cavjont anê o daou var ar plous deedet;
Monet a rejont ractal da gavet ar Person
Evit annonei deàn an desolation.

Ar Person ro lincelliou evit o liena,
Hac e ped ive an dud da zont d'o assista
Enterret e voent neuze gant peb solennite,
Laqet o daou assembles ebars er memes be.

Güelet oc'h eus va breuder, portret ur buguel mad,
Accordet e voe deàn gant Doue e vennad.
Heillet en deveus bepret Gourc'hemennou Doue :
Qemerit ên evit squer, me ho ped bugale.

Composet gant Rene ar Bars a Landeguer.



GUERZ

*Composet a neve var sujet un evenamant êruet gant eur
C'hure Santel o Escopti Mitàn.*

Var ton : **Santez Anna Palud**

ME ho ped, assistantet a bep seurt qalite,
M Deut da glêvet eur recit composet a neve,
Divar eur c'hopi gallac ehars en brezonec,
Rac util eo disclêria ar pezh zo êruet.

En Escopti eus Milan, en parros Belzoanne,
A zo eur C'hure santel, leun a humilite,
Truezus ha charitabl en andret ar beorien,
Hac a zo e oll danve evit doni d'a zouten.

El lec'h ma pos an arc'hant en devoa goneet,
Evit lemel eus anê na ziminuant get,
Ar pezh er gra chagrinet hac en nôs hac en de,
Pa ne elle gout penos ec'h erru qementse.

Er bloa tri hadaou-uguent an eiz a vit c'hoeyrer,
E rer an Ofis divin dirac hor Mam santel
Ar Verc'hez, gloriüs Vari hor güir advocades
Souten ann oll bec'herien en peb rouantelez.

Goude ar venediction demeus ar sacramant
E zeus erruet un den en ur memes instant
D'e c'houlèn da vont gantàn da velet un den clàn
A gave a voa erru en e heur divean.

Partiet int assembles gant an Autrou-Doue,
Hac an traou evit noui ar paour afflijet-se;
Dre voner e recevas e oll Sacramantchou.
Hac eun anter-heur goude e souffre ar maro.

Charmet an Aotrou Cure o velet ar boneur,
E choimmas d'e assista qen a deu da vervel,
Da bedi Doue evitàn gant eur galon barfet
Ha bete fin e vue e deus en asistet.

Pa voe maro an den-mâ e gemer e guimiad,
En eur dont da zoueti deze oll nosvez vad
Da veila ar c'horf maro pehini voa gante,
Hac e commenças e hent en eur bedit Doue.

A domistic eus an ty a voa bet evitân,
P'er güelas o partial, en em ofras dezan
Da vouet d'e gundui betec e bresbital,
Hac en trugaresqease gant eur galon leal.

Nan, eme'n Autrou Cure, ne meus aon rac netra,
Pa ê guir em eus douget Redemptor ar bed mâ,
E teuyo d'am presservi dans an drouc sperejou:
Ra credi a rân e zeo mestr d'an oll huissancou.

Êt eur pennad ac'hane, troet en eur c'hardet,
E clêvas aroc deân eur vouez terrupl o clêm,
Hac o tonet d'entent ec'karrêt en e za
Da sellet en dro dezân, mes na vele netra.

Poursu a ra e basiou evil tosta ountâ,
Hac e remercas eun den eus anciena,
Güen e vlêo hac e varo, qen a steredenne
E zaoulagad varnezan abaoe ma tosta.

En eur dont d'e vriata e c'houlenna outân
Gant calz a humilite; petra glaspit amân?
Nav heur anter eo brêmâ êt an dud da gousget.
Hac an amzer, va mignon, a zo cri ha calet.

Bet òn c'houlén loja en eun nebeut placou,
Hep ma zôn anaveet gant hini ar mestrou,
Hac en defort a repu a renqan chom amâ,
Quen deui ar sclêrijen varnôm da bartia.

Deut ganén, mar plich ganêc'h, ême'n Autrou Cure,
Ha m'ho iaco da repos ebars en eur güele,
Ha deus va c'hommodite a rêi d'êc'h da goania
Assemble ganén ouz tol, hac eus a bep güella.

Pa entreas en e di e yas da ch'oeza'n tân,
Da domma'n den ancien, d'a c'hortos oza coan,
Hac e lavaq d'en vatez; prepar d'emp coan abret,
Ma cozefomp assembles evel camaradet.

Pa voant ouz tol azeet e c'houlennas outà
Abetare brô e voa ha pïou rêr ancân,
Hac e respontas deân e voa diouz Betleem,
Emmanuel e hano, hep ma cïlas compren.

C'hoas e c'houlennas outân hac én a voa gernez;
Er vroyou a dremene dre ar rouantelez;
Hac e respontas dez in partout voa ar memez fra,
Ne velân nemet crimou abominanla.

An tadou hac ar vamou a velân meprizet
Dre oll gant ho bugale goude ma vent savet,
Hac e tennont varneze ar venjang eus an êe.
Goal gollou ha drouc amzer bac ar moralite.

Un nombr bras a vlavejou a voa en abundanc
Hac amzer vad da zestum; dre oll ar Broidanc
A ro an Autrou-Doue da veva ar bec herien,
D'ar re vo fidel deân ne vanco birvigen.

Ractal e tiparissas diouz an Aulrô Cure,
Hac e chommas estonet o velet qementse;
Hac evit e recompanç eus e chariteou,
E lar deân qen a vo en joayou an êvou.

Neuze a teu da compren e voa hor Mestr divin
En deus parlantet hac e ya d'an daoulin
Da c'houlên pardon outân eus a greis e galon,
Da c'hortos mont velet hor Zalver var e dron.

An hini neus recitet ebars en brezonnect
Tout an explication a zo grêt en gallec
A zo a baros Plouguïel, Yan ar Guen e hano.
Hac e bried ouz en ren eiz blas ha tregont, zo.

FIN.

E Moutroulez, a imprimeri P. LANGE, rue ar Pave.